

**Clec'h** (Montroulez 1788 – Kastell-Paol 1872) ( ?)

Ha barzed all dizano.

*Modernnaet eo bet an doare-skriva. Iskiz-kenañ eo doare-skriva ar skrid orin.*

Anad eo e oa bet kompozet evid ar moulla gand tud ha ne ouient ket “brezoeng skrivet“. Aliez ez eus viou-koukoug, pe geriou moulet fall.

### **Taolenn**

Kloareg Remengol

Pelerinez Remengol

Chañson Bacchus

Chañson paotred Plouillo

# Kloareg Remengol

*War don : Me 'm-eus choazet eur vestrez a Eskopti Treger.*

Setu koeñvet ar goueliou, setu mad an avel  
Da ren al lestrig am doug er-mêz a Vreiz-Izel ;  
Setu, setu-me distag a liammou va bro :  
An disparti 'zo kaled, ankeniuz ha c'hwero.

Gwenelan, o ! tad ar soniou hag enor ar Porz-Gwenn,  
Neb peleh bennag ez out harpet war da zelenn,  
Ro d'am hlemmou kimiaduz ar yez a zirollas  
Euz a hekleo Menez-Bre da hini Roh-al-laz.

Mez perag, o ! va Doue ! pa goze va halon,  
Perag goulenn sikour all evid ober eur zon ?  
Ha ne zalhit-hu ket deom, ni, peorien an douar,  
Diou vestrez a schol<sup>1</sup>, anvet Karantez ha Glahar ?

Pa zoñjan en oad eüruz a dremenis er gêr,  
Gwechall, tost d'am zad, d'am mamm, ha d'am hoarig-vager,  
E kouez va homzou ken puill hag an torad bleuniou  
A zeuill<sup>2</sup> e' taol an arnev, glizennet a zaelou.

Rag se, kent ha disklêria buhez va yaouankiz,  
E lavarinn d'am breudeur ha d'am oll genvroiz =  
« Tostait, tud kaloneg, ho-pezh atao digor  
Eur skouarn evid deski soniou greet en Arvor.

Nep ho kalv a zo ganet en eskopti Kerne,  
Ken tost d'an aod alaouret 'vel da vrug ar mene',  
E lochenn eun artizan euz a barrez Hañveg,  
An dregont a Vezeven, mil eiz-kant pevarzeg.

Nag a-wechou, pa ne oan c'hoaz nemed eur bugel,  
E weljot-hu va mamm baour o kuzad em havell  
Hag en-touez va maillurou, bara du benniget,  
Evid trehi diwarnon gwalleur an droug-spered !

Va lusked a ree bemnoz, hag aliez en de',  
En eur lavared din : « kousk, o ! va êle' Doue !  
Da wad a vez ken divlamm ha Salaun ar Foll,  
Ha ker laouen ha Mabig Patronez Remengol. »

**Patronez Remengol : Notenn gand an oberour :** An Itron *Varia Remed oll* : leh darempredet abaoe pell amzer gand ar bobl a Vreiz-Izel, abalamour d'ar burzudou braz c'hoarvezet dre halloud an Itron *Varia*, ag an hini<sup>3</sup> an iliz kaer-meurbed a oe savet eno gand mein templ an doue *Teutates*.

<sup>1</sup> schol : bet skrivet evel-se er skrid orin. Marteze eur vi koukoug, evid "choaz" ( ?).

<sup>2</sup> zeuill : ?

Evel se, dreist he mouez hlan hag he sellou c'hoaruz,  
Ne oa na sant, na louzou d'am renta evuruz,  
Ken a gavis da genta mouez ha sellou Mari,  
En-kreiz mogerious kouezet chapel goz Tibidi.

En deiz-se ; en or hoazez on-daou war an douar,  
E lavaras din : « Alber, an êlez en em gar.  
Groom evelte : laka da zorn flour em dornig,  
Hag heuill adaleg hirio seuliou da vestrezig. »

Va dorn flour en he dornig, en gwir vugaligou,  
Or gweled tro 'pad an deiz gand on deñvedigou  
War ar hleuniou keuneudeg o tastum kraoñ ha mez,  
Pe kregin arhantet e-tal mor an enez.

Aliesoh e pignem en ispill ar herreg  
Evid saludi gweloh kouent Landevenneg,  
Menez-Hom hag e veinhir, enezenn grenn, Argol,  
Ar Faou, Krozon, Plougastell, hag iliz Remengol.

Ahane 'kerz an avel,distroet en eur yez,  
A hweze d'on diousskouarn a vor Douarnenez,  
Ar vouihadenn<sup>4</sup> spouronuz a skleñj atao dizon  
Dindan stumm eur vran mor-zu, merh ar roue Gralon.

Mez an torad malloziou roet d'or yaouankiz  
Gand ar briñsez a werzas alhwez strujou Kêr-Iz,  
N'he-devoa digand Mari,beb gwech m'o hleve,  
Nemed eur sin goapauz hag eur c'hoarz a drue'.

Seder evel eur goulmig en uhella torgenn,  
E tispake d'an avel he bleo hir ha melen,  
En eur deul war he bro, war an dour ha ganen  
Eun daoulagad a zellou ker glaz ha bolz an neñv.

Hag evel ma seblanete gortoz askelligou  
D'he has, a-raog an amzer, dreist ar hoabrennou,  
E tiskennen goustadig en peuraj on deñved  
En eur lavared : « amañ e vi sonnoh er bed. »

Eur rozenn hanter-digor n'he-deus na liou, na c'hwez,  
N'o haved oll kemmesket en genou va mestrez.  
Hag he zal, he goug, he dorn hag he zroad diarahenn  
N'o-devoa heñvel outo nemed erh ha spern gwenn.

A-wechou pa fazien, dre zudi pe dre hloaz,

---

<sup>3</sup> ag an hini : a behini, er skrid orin.

<sup>4</sup> Ar vouihadenn ?

He divreh karantezuz o kendro va diouskoaz  
Am lake da zond ker yah hag a oe va dervenn,  
En eur blij hag a zivoan en skoulm an ilioenn.

Perag, emezi, d'ar houlz e vijem er hiz-se,  
Perag soubla dre joaiou pe drubuill ar vuhe' ?  
Bez kaled ha stourm oute, rah hennez eo mennad  
An hini a gar muioh eged mab he lagad.

Petra 'deufen da veza, ma trohfe an ankou  
An neudenneig a liamm entreze on deziou ?  
Siaz ! eur vleuenn diskourr, eun durzunell hep par,  
Eur zon glemmuz o vouga dindan eur bez douar.

Ar garantez on unvan, on diou galon drezi  
A zo gouestl ha kizidig a boaniou pep hini ;  
Evel-se mestaol euz ar maro dudrue',  
En eur ziskar ahanout, Alber, am diskarfe.

Ha ma ven-me kantvloaziet, em-bo soñj euz an deiz  
A zegas da Remengol, a gêriadennou Breiz,  
D alid e-keid ar Pardon, eun ed gristenien ;  
Rag en deiz-se me 'douas he haroud da viken.

Pa roudennas an amheol arhantet en neñvou  
Ha ker mintin e richan al lapousedigou,  
Goude beza, gand Mari, heuliet an hent berra,  
E weljom er bourk santel eun arvest ar haerra.

Ar bobl euz Vreiz-Izel ! eur hemmesk a beb giz  
O tond euz an oll hentchou war-zu hent an iliz,  
Hag oh ober a beb yez eur yez karantezuz  
Evid kana meuleudi Mamm ar Mabig Jezuz.

Al Leonad a zoug e gañv a-raog ma son e hlaz,  
O tribun e chapeled war benn e zaoulin noaz ;  
Ar Hernevad o pedi Mamm an Aotrou Doue  
Gand ar vouez a zifreuzas obadenn ar mene'.

Hag en kichenn ar pagan, a stoue ken dibaot  
E dal rouz, en eur houlenn peñse founnuz en aod,  
Ar Gwenedad birvidig a ouele an Arvor  
O reketi rouarnez, feiz, emgann hag enor.

Merhed deut a bep kontre ha gwisket en pep stumm,  
E-touez ar re<sup>5</sup>, pa vijent o vale rumm ha rumm,  
E weled ar plah yaouank a gostez Rosporden  
Koulz hag hini Landreger hag hini Lezneven.

---

<sup>5</sup> : pere, er skrid orin.

Trompill an diveruzed o son er c'horioù :  
Tud a vrud fall o kuzul an dennerien kartou,  
Peorien dall ha kleñveduz o kinnig o *Fater*  
Hag o finijenn galed evid eru hoz diner.

Eun niver braz a dud skuiz ;o hedal er feunteun  
'Rank evid galloud kemer, euz a bicherou leun,  
An dorut ar muia brudet a zour ar manennou,  
Da rei nerz ha da beurgas ar remm hag an urlou.

E skuill a reent en o hein, en o divreh eünet  
Koulz ha dreist an izili o dalhe furbuet ;  
Hag evel on tadou koz e teuent da bedi  
D'ar feunteun-ze ken karet gand ar Werhez Vari.

Hag e lavarent, setu gante o fedennou,  
A bured<sup>6</sup> ar *remed oll* stag euz o chupennou :  
Ni a vezo divahagn oh erruoud er gêr.  
Kenavo d'or hleñvejou, kenavo d'or skuizder.

Goude beza kendroet aliez ha dre boan  
Er bourk, a-wachou ker braz, an deiz-se ker bihan,  
E gir, krog en dorn Mari, da stal ar skeudusa  
Da choaz, a-raog an distro, gwalenn ar bromesa.

Klask 'eure pell e kemmesk an niver a-hizou  
A zegas tud a Vro-hall en-kreiz or pardonioù,  
Ken e welas o luha, war unan alaouret,  
Diou galon entre daou zorn, ingal ha kurunet.

« Deom, emezi, bremañ, p'he douge war he biz.  
Hag eur pennad goude-ze, daoulinet en iliz,  
Dirag aoter ar Werhez a resevas on le,  
E toujom en em gemer an eil hag egile.

Triddegou<sup>7</sup> yaouankiz ha karantez wirion !  
Perag e tivoanjoh<sup>8</sup>-hu ken abred em halon ?  
Heñvel euz ar bleun a skign c'hwez ha liou re abred,  
Dindan ar henta ez oh ivez flastret.

Eur verradenn blijadur en eru mor a zaelou,  
Siwaz, hounnez eo buhez kalz a reuzudigou ;  
Mez al laouenidigez a dremen, hir ha berr,  
Skoet gand falh an ankou pe gand falh an amzer.

D'ar houlz-se 'm-boa seiteg vloaz ha Mari kemend-all ;  
Hep, evid se, kaoud ar skeud a zoñjezonou fall ;

---

<sup>6</sup> bured : ?

<sup>7</sup> Triddegou : ano bet savet gand an oberoour a-ziwar ar verb *tridal*.

<sup>8</sup> Triddegou : divoana : verb savet gand an oberoour : di - moan

Or halon a oa ken flamm ha tarzadou an de'  
Pa zaillont a-raog an heol euz a greh ar mene'

Ha koulskoude va mestres a welen o sempla,  
Ar plah a-douez ar plahed a garen ar muia  
A dlee kimiadi ouzin, mervel ha va gortoz  
E-touez an arhêlez a nij er baradoz.

Dre ma implijed ganti poan ha louzou an dud,  
Ne ankounac'haent ket ar zent o-eevoa brud ;  
Evel se, leun a fiziañs, eur zadornvez vintin,  
E kemeris va bisah ha va baz pelerin.

Pa glevas em-boa gouestlet anezi da Zoue  
Ha d'an oll zent gallouduz a bedom er hontre,  
E savas gand trugarez he mouez, allaz ! semploh,  
En eur zistell warnon eur sellou tenerroh.

« Perag, Alber, emezi, va dilez en keit-se  
Ha mond e-pad an amzer a zigoro va be',  
Da weled êl ar goañv a skub an deliadou  
Hag a diruill aneze pell euz or berejou ?

Mez pa 'h-eus touet ober evidon eur veaj,  
Ar groaz aour euz va herhenn a vo da heritaj :  
Da galon a vo kreñvoh o tougen anezi,  
Hag en tro pad da vuhez e-po soñj a Vari.

Kemer eta diganen an Doue burzuduz  
A rentas va deveziou laouen hag evuruz.  
Na ouel mui, neb en em gar, Alber, en em gavo.  
Krog em dorn c'hoaz eur wech, ha bremañ kenavo ! »

Eun eur goude va fedenn, o skuill hag o tiroll,  
A nije d'on patronez en iliz Remengol,  
Hag echuet an teir zro d'an aoter, e saven,  
En eur rei, evid ofrañs, eur houriz koar melen.

Itron Vati ar Follgoad, Itron ar Goz-Yeoded,  
Sant Yann-ar-Biz, Sant Urlou, Santez Anna-Wened,  
A bedis d'he renta yah diagent va distro ;  
Mez an taol a oa skoet, hag he havis maro.

Pa n'em-boa ket diframmet en deiz-se va halon  
Ha stalpet ar horv paour-mañ da besked ar mor don,  
Eh hellan trugarekaad dorn an Aotrou Doue,  
A reas eur gwir burzud o tiwall va buhe'.

He hlask a reen en enez, en aod hag en hentchou,  
En eur gemmesk he ano gand va huanadou ;

Ha skuiz, eh een da voueta, skuiz ha sempl o redeg  
Etre mogeriou disto kouent Landevenneg.

Hag eno, kalz êzetoh, e skuille va halon  
Dirag bez roue Kêr-Iz, bez ar roue Gralon,  
Ha re ar veneh santel a re an eskern  
A zo bet dizouaret ha losket en eur bern.

En abardaevez, stouet e talgen eur hoz be',  
E savas en dirazon skeudenn sant Gwennole  
En eur lavared din : « peoh ha bennoz dit, Alber !  
Beleg e ranki beza ; sao ha kee da Gemper. »

Ha setu, pa'z on beleg, o vond da gas ar feiz  
E-mesk an dud gouez a chom pell a veneziou Breiz,  
E houlenan digand Mestr an neñv hag ar bed oll,  
Danvez eur gwele douar en bered Remengol.

Eno, dirag ar Werhez, a veulis em havell,  
Gand va zud ha va mestrez, ha dindan heh askell,  
E rin gwelloh ar housk hir am strafuill aliez,  
Beteg ma c'hwezo trompill êl ar varnedigez.

Hag eno, war treuz ar bez e savis d'am zud koz,  
Goude ma vin distroet, ha pa vin o repoz,  
Pelerined Remengol, pedit, pedit Doue  
Hag e Vamm garantezuz da reseo va ene.

O ! Mari, va mestrezig ! o ! bleuenn ar mene' !  
Repoz en-kreiz at c'hwez mad a skuillez en Kerne  
Hag en-touez ar yaouankiz, en em gavo bepred  
Evdi kana da furnez ha da vuia-karet.

Ha bremañ, va henvroiz, deskit ar ganaouen :  
Saillet eo euz va halon 'vel eun huanadenn ;  
C'hwibanit son ar hloareg en lochennou va bro.  
Pedit goude an disparti, pedit goude an distro.

## Pelerinez Remengol

An avel a oa yen, an douar skornet-oll,  
Penn-da-benn gand an hent a ya da Remengol.

Eur wregig paour en eur grena,  
Pelerinez<sup>9</sup> santel, war he zreid diarahenn,  
A yee, hag en he dorn eur walennig wenn,  
Da di an Itron Varia.

Arru bete 'n aoter : « Deut on c'hoaz d'ho kwelad<sup>10</sup>,  
Gwerhez, dre m'ho karan, ha dre ma 'm-eus soñj mad,  
Pa deuis kenta d'ho ti santel,  
Neuze, war va daoulin tro-dro d'ho mur a ris,  
Leun euz ho karantez, gand daerou ho pedis,  
Ma vijen mamm heb dale pell.

« Kousket war va halon, a-benn deg miz goude,  
He-doa eur mab bihan, eun êlig da Zoue.  
Evel peb mamm gê e kanen,  
Tad-koz en korn an tan a hoarze o selaou.  
Allaz ! petra 'oa din neuze kana soniou ?  
Ar vuhez 'zo c'hwerf da dremen !

Red eo kaoud soudarded, ha warhoaz or bugel,  
Ma n'en-devez souten mar deut d'hen dilezet,  
Da vrezelour 'vo kemeret !  
Ha ni, tud koz mantret, petra 'raim er vro ?  
A ! koulz e vo hada louzaouenn ar maro,  
Dirag on dor bepred serret !

Evid va mab em-eus greet ar pezh a hallen ;  
Peillet em-eus uhelvarr, melchon ha benterhenn<sup>11</sup>  
Da noz war bord an hent distro ;  
Eur wallen sten, er bourk, 'zo din benniget mad,  
En eur feunteun zantel eo gwalhet an dillad,  
Ar re<sup>12</sup> warhoaz 'vo war e dro.

Eun harp c'hoaz a vanke, nerzusoh ha douosh ;  
Va gwalenn wenn em dorn on deut beteg ennoh ;  
N'am-eus goulou na kurunenn,  
Ni, labourerien baour, n'on-deus netra ebed,  
Koulskoude e teuom ; on anaoud ma ret ;  
Gwerhez, c'hwi 'zo mamm ar beorien.

C'hwi 'ziwallo va mab, c'hwi hoh-eus hen roet ;  
Ne fell ket deoh e ve didud ha divroet,

---

<sup>9</sup> Pelerinez : galleg.pirhinirez.

<sup>10</sup> kwelad kweled (evid ar rim).

<sup>11</sup> benterhenn : gwenterhenn

<sup>12</sup> Ar re : Pere, er skrid orin.

Kaset pell euz ar menez-mañ.  
Nann, nann, ne fell ket deoh e ve 'vel hualet,  
En mogeriou eur gêr el leh na gomzer ket  
Ar brezoeng evel amañ.

Or bugel a zo dem ! nann ! ne gredin biken  
E ve deut eur ar pred, ma ne ve em hichenn,  
Euz an daol o tebri e damm ;  
Her gweled, evidom n'eus ket a vuhez all !  
Laouen e vez debret eun tamm bara segal,  
P'en debr ar mab gand tad ha mamm.

Eun deiz, o ! mamm zantel, ho mab heb lavared,  
(Ha se gand beleg 'zo bet din gwarantet),  
Da iliz eur gêr vraz e yes<sup>13</sup> ;  
E glask a reeh dre-oll, e hervel gand daerou,  
Evid ho tiboania e klaskeh ar helou ;  
Ema amañ, eet heb enkreuz.

O ! Rouanez an neñv, ar gomz-se a glaskeh,  
En amzer ho poaniou, d'ar houlz ha ma oueleh,  
Gret m'he hlevin bremañ-souden.  
Leveret d'ho mab ker, pa eo bremañ Roue,  
Penaoz diouer eur mab a zo digand Doue  
Brasa anken eur vamm gristen.

Kenavo 'ta, Gwerhez, bet em-eus va mennad ;  
En eur gana oh braz, ha dreist pep tra oh mad ;  
War-zu ar gêr en em dennan,  
Sempl e oan oh antren, o vond kuit eh on serz,  
N'ay ket kuit... chom a ray... mez en desped d'am nerz,  
Hag e krenan, hag e ouelan.

An neb a ra ar werz 'zo kristen, 'zo Breizad,  
Hag ar vamm, hag ar mab, a oar da anaoud mad,  
Hemañ en Kerenneur merer,  
Da noz, en harz ar groaz, aliez a lavar,  
E tle an evrusted en-deus war an douar,  
Oll,da batronez e vamm ger.

---

<sup>13</sup> yes : yeas.

# Chañson Bacchus

Euz a zouez ar Baryaned,  
Bacchus ez eo an idol.

E ano 'zo Yann Vourdel,  
C'hoaz en-deus mil ano drol.

Antreom en ostaliri,  
Arsa eta, kamarad.

Tostait amañ, va migon,  
Ma mem peb a chopinad.

An Tad Santel en e Balez,  
Gadn e oll Gardinaled,

A evi gwin a-chopinadou,  
Hep soñjal en droug ebed.

Ar Veneh en o houentchou,  
Ar velein reglet mad,

N'o-deus evdi o forsi<sup>14</sup>  
Nemed beb a chopinad.

Ni, entrezom, kamaraded,  
A Zant-Paol, a Zant-Anton.

Pa deu eur mignon d'or gweled,  
E redoubl or porsion<sup>15</sup>.

Deut eur mignon d'or gweled,  
Doublit din eur chopinad.

Ha me ne vin ket skrupuluz  
En-kichenn eur voutaillad.

Pa ven em oll gontatamant,  
Hag em oll blijadurez,

A zo<sup>16</sup> gwelloh eun treitour,  
A-zirazoh ho meulo.

Hga a raio goap ahanoh,  
Goude ze ho tikrio<sup>17</sup>.

---

<sup>14</sup> o forsi<sup>on</sup> : galleg (gand ar hemmadur p/f)

<sup>15</sup> E redoubl or porsion : galleg.

<sup>16</sup> A zo : ez eus.

<sup>17</sup> ho tikrio : galleg.

Gwalh an tasou-mañ, keginer,  
Kerz beteg ar varrikenn.

Ha ma vank dezi he alan,  
Laka sao dindan he fenn.

Toud e ranko beza evet,  
Heb na chomo eur berad.

Ken ma yelom euz an ti-mañ,  
E vo lipet an tufad.

Manket eo alan dezi,  
Ne deu mui nemed al li<sup>18</sup>.

Arsa, eta, kamaraded,  
Dem-ni pep hini d'e di.

An ostiz hag an ostizez,  
O-deus servijet mad.

O-deus roet dem sklêrijenn  
'Hed an deiz da labourad.

Lipet hoh-eus toud ar gwin koz,  
Al likeur,al lodivi<sup>19</sup>.

Ha soñjom moned da eva,  
Ne zivera bannah mui.

Aesa, eta, kamaraded,  
Poent e' dem en em guitaad.

Pa vo deut hini nevez,  
'Nim 'bo peb a chopinad.

En an' Doue, pa vin maro,  
Ne zoni ket ar hlazou din.

Ar piton<sup>20</sup> hag ar gwerennou,  
Ar re-ze a zono din.

E skol Bacchus, ma 'peus desped,  
Goro piz ar varrikenn.

Eñ a zo eun den a spered,  
Bez' en-deus kalz a skiant.

---

<sup>18</sup> al li : galleg "kaoh-jistr".

<sup>19</sup> Al likeur,al lodivi : galleg.

<sup>20</sup> piton : ?

En an' Doue, pa vin maro,  
Va interet e kav ar gwin.

Va zreid dindan eur varrikenn,  
An duellenn euz va min.

Ar beradou a zivero,  
A gouezo e-barz va genou.

Ha mar deu dezi didala,  
Gwalh va halonenn 'm-bezo.

Arsa, eta, kompagnunez,  
Bremañ 'fello deoh kleved.

Piou en-deus war sujed Baccus,  
Ar zon nevez kompozet.

An hini 'n-eus he hompozet,  
A zo eur baleer-bro.

En eur eva chopinadou,  
Divinit piou e ano.

# Chañson paotred Plouillo

*War ton : Adieu, Pontreo.*

**Eur bern geriou galleg a zo e-barz, bet skrivet evel ma vefent brezoneg.**

M'am-bije spered da gompren, evel am-eus fantazi,  
Me a vije 'n em implijet da zoned da gompozi.  
Eur himiad leun euz a hlahar, greet da goñskrived yaouank.  
O-deus tennet ar billed du e-barz er bloavez prezant.

E-barz ar bloaz mil eiz-kant c'hweh, ar bemp a viz Gwengolo,  
Ez eo degouezet adarre euz a barroz Plouillo,  
Tud yaouank, evid an arme, td euz ar er derrupla ;  
Glaharet e' o oll lignez, p'o gwelont o partia.

Da bartia gand an aktif<sup>21</sup> n'ez eus ken nemed pevar :  
Erwanig Jakob, euz ar bourk, ha Gwiljan ar Meleda,  
Ha Yannig Prad euz ar Hoajou ha Pipi an Aveant :  
Pevar den euz ar re vrava, korvou kaer, ha tud vaillant.

Erwanig Jakob a lare en deiz-se d'e gamarad :  
« Hemañ a zo eun devez trist hag a ra din kalonad !  
Gweled va mamm baour o ouela, ha va zad kêz dezolet !  
Va halonig e-barz em hreiz 'zo dija kazi rannet.

Kalz a zoñjfe se, marteze, penaoz e ven eur poltron,  
Em-be aon rag eun tenn fuzuill pe rag eur vouled kanon,  
Peotramant aon rag an fatig<sup>22</sup>, o vale dre an hentchou,  
Pe gousked war eur gwele kan<sup>23</sup> e-barz ar hordegardou<sup>24</sup>.

Dougen va dillad war va chouk, va fuzill ha va zabrenn.  
Bale bemdez a gêr da gêr dre ar fank hag ar vouillenn ;  
Ha goude e fin va beaj, rankoud marteze kampi,  
Pe gousked war an douar yen, peotramant bivoaki.

Tor<sup>25</sup> o-deus an neb a zoñj se ; ma halljent lenn em halon  
Evid gweled va bolontez ha va iñklinasion ;  
Ma na faotfet nemed va gwad, me en em skuillfe toud joauz  
Evid souten on impalaer, eun tad ken karantezuz !

Piou ne gombatfe ket hardiz gand eun Impalaer kristen !  
Eur gaoz ket just hag e hini a zo fasil da zouten,  
Pa' om memprou da Jezuz-Krist, soudarded an Aviel.  
Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Spered Santel.  
Arsa, kamaraded, kent kuitaad euz or hontre,  
Dem-ni da iliz Plouillo da zuplia on Doue  
D'or prezervi demeuz gwall chañs pa vezim en armeou  
Ha da gonsoli 'barz er gêr on tadou hag or mammou.  
Adieu deoh, Aotrou Sant Millo, patron euz ar barroz-mañ :  
Adieu, kerent ha mignoned, sesit<sup>26</sup> bremañ da ouela :  
Pedit Doue hag ar Werhez da gaved soagn<sup>27</sup> ahanom,

---

<sup>21</sup> aktif : galleg.

<sup>22</sup> fatig : galleg. : skuizder.

<sup>23</sup> kan : ? Marteze "kaon".

<sup>24</sup> ar hordegardou : galleg "corps de garde"

<sup>25</sup> Tor : galleg. Gaou a ra...

<sup>26</sup> sesit : galleg. paouezit.

<sup>27</sup> soagn : galleg : evez.

Hag on Êl mad d'or hundua partoud e leh ma'z efom.

Adieu, va mab, va esperañs, eme an tad dezolet !

Pa vin akablet gand kozni, me vo klevet o lared :

Ma vije va mab kêz er gêr, en-dije va zoulajet.

Klevit ar vamm o kimiadi ivez digand he bugel :

Deut amañ c'hoaz ma'h ambrasin eur wech kent eged mervel ;

A-benn ma returni d'ar gêr, me 'vo eet euz ar bed-ma',

Deus amañ etre va divreh evid ar wech diweza.

A-gichenn ar momant fatal ma'h eus tennet d'ar billed,

Bemnoz 'vel ma fo din kousked,me a zeblant da weled

O tond euz eur gombat sañglañ, war eur chariot bleset ;

Pe taolet en eun ospital, gand an oll abañdonet.

Ar soudard yaouank koñtristet, c'hoaz kent eged partia

Evid êsaado hoñsoli a lavar, en eur ouela :

Tavit, va zad ha va mamm baour, ha bevit en esperañs :

Doue, tad a vezirikord, a zo braz e Brovidañs.

Goude ma vo fin d'ar brezel, ha gounezet ar viktoar,

Gand gras Doue hag ar Werhez, e vezo fin d'ho hlahar

Evid merk euz or vaillantiz gand lore deuz on tokou.

Ni a zistroio prest d'ar gêr evid sehi ho taelou.

Adieu da barroz Plouilloha d'he oll habitanted.

Adieu d'on oll anaoudegez, ha kerent, ha mignoned :

Ha ma na mem ket ar boneur er bed-mañ d'en em weled,

Gras deom e-barz er Baradoz asamblez d'en em gaved.

